

## KIS-613 – Gl. identifier

(GE da RAH – 31 12 98)

En notenn-mañ e rin dave da notennoù all embannet e-barzh LAVAR a venegin, da skañvaat, dre ur bennlizherenn :

- A – KIS-027, “Br. **hennad**”, La-03, pp. 92 hh.
- B – KIS-064, “Gl. **intuitif, discursif**”, La-04, pp. 46 hh.
- C – KIS-277, “« Anaout ». Dezrann bredoniezhel”, La-08, pp. 135 hh.
- D – KIS-393, “Gl. **discerner, discriminer**”, La-09, pp. 352 hh.
- E – KIS-437, “Gl. **(e)spé/èc-**”, La-10, pp. 130 hh.
- F – KIS-471, “Gl. **identité, idempotence**”, La-10, pp. 264 hh.
- G – KIS-501, “Br. **treün, kevun, arun** : eus ar c'hantouezañ d'ar Jedoniezh”, La-10, pp. 393 hh.
- H – KIS-540, “Hiniendded ha treüded e preder Hans JONAS”, La-11, pp. 210 hh.
- I – KIS-576, “Al. **Retention, Protention** e preder HUSSERL”, La-12, pp. 78 hh.
- J – KIS-578, “Gl. **identique, différent**, h.a. er Jedoniezh, er gedvuhez, er Brederouriezh”, La-12, pp. 101 hh.

Tro hon eus bet er bloavezhioù tremen da bleidiñ gant steriegezh kemplezh Gl. *identité*, Sz. *identity* (La-10 *passim* & F ; La-11 *passim* & H). Ken puilh all eo kemeradurioù Gl. *identifier*. An termen orin eo an iLa. *identificare* "lakaat da vezañ an un". Ar ster-mañ, o tougen war ar bout, n'eo ket steuziet er yezhoù arnevez nemet ez eo e-keñver an anaout dreist-holl e vez arveret diskennadoù ar ger izellatin, ac'hoel e galleg hag e saozneg. Kregiñ a rin enta gant studi Gl. *identifier* oc'h aroueziñ furmoù eus an anaout, eus anaout ar gwerc'hennoù da gentañ, d'an eil eus anaout an derc'hennoù. Da c'houde e tistroin da ster Gl. *identifier* e-keñver ar *bout*, eleze "lakaat / dont da vezañ an un", ster advevaet gant prederourion 'zo en 20<sup>t</sup> kantved ha gant ar Bredelfennerezh.

*I**D  
E  
N  
T  
I  
F  
I  
E  
R**E  
-  
K  
E  
Ñ  
V  
E  
R**A  
N  
A  
O  
U  
T***ANAOUT AR GWERC'HENNOU**

Er c'heñver-mañ ez eo kevatal Gl. *identifier* da Br. *daznaout* (C, p.137). Tri derez a ziforc'hin : an *daznaout hinienn*, an *daznaout rummenn* hag ur furm all nad eo mui un *daznaout*, eviti da vezañ a rumm anadennoniell gantañ : an *ernaout*.

**DAZNAOUT HINIENN**

Kel zo amañ a zec'havaelañ un draezenn evel bet dec'havaelet c'hoazh. Lakaomp e spurmantan e ti X ul levr a 'm boa ezaouet. Greomp dezrann anadennoniel an daznaout a ran neuze. Daou arvez a zigejer : un *nadiñ*, un *dodiñ*.

*Nadiñ* (B). Dec'havaelañ al levr evel va levr bet ezaouet a c'hoarvez eus ul lankad ergorañ unel ha n'eo ket eus ur gemalenn a ve da skouer merzhout + kounañ + kendodiñ. Ur merzhout eo an nadiñ a ran, hogen ur merzhout a zo dezhañ donder amzerel : ne zavean ket diwarnañ d'ar c'hounañ, ar c'hounañ eo a zo lodek ennañ ; kenkoulz e lavarfen : an nadiñ a ran zo ur c'hounañ, ur c'hounañ bev hag oberiek a zo war un dro merzhout en unan eus bleinoù an donder amzerel ez eo. Diwar vont, merkomp hon eus bet tro c'hoazh da venegiñ ar bleinoù-se eus ampar amzerel ar merzhout dre ober anv a *erouez* hag a *zierouez* (*Emsav* 126, p. 10 & 127, p. 43 ; La-08 *passim* & p. 201 v° Gl. *inent* ; La-10 & -11 *passim*).

*Dodiñ*. Diwar an nadiñ kentañ ez an d'un dodiñ : “Al levr a 'm boa ezaouet eo hemañ.” Hevelep dodiñ avat ned eo nemet un tebiñ a 'm bo da ategañ. D'e ober e luskan argeziadoù nadiñ all : stadañ ar saotr-mañ-saotr war ar golo, klask merkoù a ouzon emaint war bajennoù 'zo, h.a. E digor an nadiñ kentañ e tfluk un heuliad nadioù all ; poell an heuliad-se, an ere etre an taolioù nadiñ, ned eo ket a natur gant an nadiñ, un aregañ eo.

A drugarez da hemañ e loc'h an dodiñ eus par an tebiñ da hini ar warded : an daznaout (Gl. *reconnaissance*), na c'halle bezañ evit un arseller nemet ur goulakaat pe un darlakaat, a zeu d'un hennadiñ (Gl. *identification* — A, D, p. 352 ; La-10 *passim* & E pergen ; H, p. 230) direndael. O kouezhañ en tech a oa diouzh ar c'hiz er c'hantved a ra e dalaroù e lavarfen : *hennadiñ zo nadiñ henn*.

Evel pep aregañ ez eo jedoniekadus an argerzh aregel lodek en hennadiñ. E adkavout a reer er Stlenneg e rezh an *daskavout* (Sz. *to find*, Gl. *retrouver*), a zo haeziñ ur stlennad klok adal un ditour darnel anezhañ.

Un degouezh dibarek eo hennadiñ un hinienn pa 'z eo houmañ ur bev, un den. D'ar sell kentañ, war ar pemdez ez eo rez d'ar reiz daznaout ur wezenn, ul loen, seul gent a se un den. Hogen kement striv da reiñ ur staelad prederel d'an hinienned en deus diskoachet un argraf eus ar re gempleshañ. An hentenn huserlek he deus hon degaset d'ober eus an dodiñ hinienned ur c'hoaliñ (G, pp. 395 hh.). Diouzh e du, e tiskouez Hans JONAS ez eo hinienned ar bev an disoc'h bepred arvaret eus ur striv didorr da vezout (H, pp. 219 hh.). Er C'hoariva, adalek *Menaechmi* PLAUTUS betek *The Comedy of Errors* gant SHAKESPEARE, e vordilh ar plegennoù ma tilamm an darvezadur diwar ar mesk e hinienned an tudennoù. Evit al lezenourion n'o deus ket diwelet ar skoilh : e pep amzer e voe unan eus damantoù ar frammerion gevredigezh

naskañ an hinienned e-barzh ur reizhiad daveiñ stabil ha diforc'hell : al lignezoù en hened, marilh ar boblañs hiziv. Goloet eo isfont an hinienned gant melezour ar *bivelezh*, dre se karzhet an argraf trabedel, erlec'hiet outañ ar gartenn a vezomp endalc'het da erouezañ bewech m'en rekiz derc'houezerion al Lezenn. Diwar vont, menegomp ar bevennoù a zo da *gentaenn ar bivelezh* ; bevennoù devoudel evel da skouer ar c'hemmañ pivelezh war-benn hepkoriñ al lezenn (tun korvoet sof-kont er filmoù amerikan), bevennoù lezennel evel an digastiz diwar hirzale — a c'hallfed intent evel azon un douetañs a-berzh an Dezvour war dreüinded an hinienn.

Pe dermen brezhonek arverañ a-dal da Gl. *identifier* er c'hemeradur “hennadiñ un den a-zave da varilh ar boblañs”, eleze “savelañ e bivelezh” ? Anat eo ez eo kevazas ar verb hollek *hennadiñ*. A-walc'h avat e kredan bezañ lakaet a-wel dibaregezh ar c'hemeradur evit ma klaskfemp un termen all arbennikoc'h. Evel ma 'z eo an *hennad* “kement a ya d'ober un *henn*, eleze kement en laka da vezañ henn ha n'eo ket un all”, e savfen a-walc'h an termen *pivad* hag en en despizfen evel “kement elfenn a dalvez da amparañ *pivelezh* un den, eleze da ziforc'hiñ ur *piv* diouzh un all”. Diwar *pivad* e teverfen ur verb *pivadiñ*, sk. : “Ur wech hennadet ar c'harr e voe aes *pivadiñ* kirieg an darvoud.”

#### DAZNAOUT RUMMENN

A heñvel luniad eo ar furm-mañ a zaznaout war-bouez an diforc'h n'eo ket un hinienn an divoud met un doareenn boutin etre lies hinienn. Ar mezeg, o verzhout ur c'hoñvadur war ur biz, en nado evel ur veskoul. Ar c'hounañ bev oc'h amparañ donder amzerel e verzhout zo bet diorreet e ser e studioù hag e embreg micherel. An taolioù nadiñ renet war-benn amprouiñ ha klokaat an nadiñ kentañ a c'hoarvezo, lakaomp, eus un elfennañ bevoniell, ur skinluniñ, h.a. Araezet e vo c'hoazh hervez an un argerzh aregel evit tremen eus par mardevek ar goulakaat, hini an nadiñ kentañ, betek par gwirevek an hennadiñ diarvar. Hentennekoc'h eo an treug, met a un natur gant an hini hon eus deskrivet a-zioc'h evit dezrannañ daznavezadur al levr ezaouet.

Evel a ouzer, eus hennadiñ ur c'hleñved e reer *deznaouiñ* (Gl. *diagnostiquer*, Sz. *to diagnose* — KIS-056, La-04, p. 32) hag eus an disoc'h anezhañ, an *deznaou* (Gl. *diagnostic*, Sz. *diagnosis*).

Lec'h d'ar jedoniekkaat eo ivez an argerzh aregel embreget evit deznaouiñ. Deskoniet e vez ijinenoù da *naouaat* ar stummoù hag ar sonioù

(sl. GSTL. ¶¶ 3500, 3501). E degouezhioù 'zo e vez fiziet en urzhiataerioù an emell da beurober an deznaou dre bourchas dezho un teskad azonoù ha keladoù diseurt a-zivout ar c'hlañvour.

#### ERNAOUT

Ouzh an daznaout e stagan ar rumm anaout-mañ daoust ma n'eo ket un daznaout er ster strizh : n'eo ket ur c'hounañ a zo e blein dierouez ar merzhout — nemet e vennfed intent *kounañ* hervez ur ster hogos dilezet o tennañ d'e wrizienn \**men* "dezevout" (DGVB 115). E tro an daznaout e vez adenaouet er bremañ dre ar merzhout an anaout tremenet eus un divoud : al levr a oa e 'm c'herz hag a adkavan e kerz un den all zo an un levr, ar veskoul stadet war ar c'hlañvour zo an un naoued hag ar veskoul deskrevet en dornlevrioù kleñvedouriezh. Hogen empentomp plegennoù all, da skouer pa zegouezh ul levr nevez etre hon daouarn, pa emgav ar mezeg dirak ur c'hleñved dianav. En dro-mañ, an divoud merzhet er bremañ ned eo an un gant divoud ebet en tremened, ne c'haller daznaout ennañ netra bet merzhet c'hoazh : un hennad digent eo. An hent d'e nadiñ, d'e hennadiñ — pe, dre adfeilhañ en ur c'hoari gerioù dispredet, d'e *nadiñ en e henn* — ne c'hell ket bezañ an daznaout, met an *denaout* (C). Ouzhpenn ur c'hounañ eo enta blein dierouez ar merzhout — nemet ez asantfed klevout e *kounañ* estreget un treiñ etrezek an tremened — bez' ez eus anezhañ un tennder etrezek an dazont, ur ranellded, ur gortoz, ur meni *kounañ gwerc'h* o c'hervel divoudoù bezus. E se, hep disteurel *denaout*, e stad an ne zeouez ket hevelep termen an tennder etrezek an dazont a zo marteze an doare pennañ eus blein dierouez ar merzhout ; dereout a rafe kentoc'h ouzh ur mod anaout gwan, diasavel, digas, an anaout a reomp da skouer pa gejom gant traoù pe dud dianav hep c'hoantaat gouzout muioc'h diwar o fenn. En eneb, an tennder yac'h, feizleun etrezek an dazont a gaver eztaolet en e nerzh gant ar verb *ernaout*.

N'ouzon ket betek pe boent ez adkavan amañ ar rummennoù savelet gant HUSSERL en e *zezrann* eus ar merzhout (I, pp. 82 hh.). Goude diskouez emañ ar c'hantvout trevonnet gant ar merzhout dre berzh an daou arvez eus hemañ ez eo an *drektennañ (Retention)* pe c'hoazh *kounañ kentael* hag ar *raktennañ (Protention)* pe c'hoazh *gortoz ragarvezus* (savlec'hiet o daou er "bremañ bev"), e keveneb HUSSERL ouzh ar merzhout ar *c'hounañ frank* hag an *derc'hennañ a'n dazont* (savlec'hiet er-maez eus ar bremañ bev, an eil en tremened, egile en dazont, eleze derc'hennet, neptuet). Dre ma ra eus an Anadennoniezh ur brederouriezh a'n emouezañ, e kav din e chom HUSSERL kantet en deskrivadurioù diasavel hag e tiouer an araez d'ober meiz war an troc'h a lak etre gwerc'hel ha

derc'hel, etre ar “bremañ bev” hag an derc'hennadoù neptuet. A bouez eo digemmañ *Nacherinnerung* ha *Wiedererinnerung*, eleze *kounañ kentael* ha *kounañ frank*, h.a., e welet hon eus e studi geneliezh an oberenn arz (KIS-593, La-12, p. 211 n. 1). Nemet ez a klokoc'h talvoud gant seurt digemmadur ur wech savlec'hiet an daou vlein erouez-dierouez e dialusk ar merzhout ha dilezet ar mennad dezrannañ ar merzhout evel un arc'hwel, mar andoniek ve, eus maezienn an emouezañ.

Tennder ar merzhout etrezek divoudoù bezus, ar *c'hounañ gwerc'h* (termen a gavan gwell eget ar *Vorerinnerung* huserlat), zo kalon an arz hag ivez keflusker ar skiant. Tro 'm eus bet da zeskrivañ derezioù an anaout en un diskiblezh ken deskrius hag ar Rummataerezh el Louzawouriezh hag el Loenoniezh (E, p. 132); daznaout, eleze *spesadiñ*, *deznaouiñ* (Gl. *faire le diagnostic de*) ar spesad ma vo renket un hinienn, a lakaer a-gevenep da ernhout, eleze *spesadekaad*, *ernaouiñ* (Gl. *faire la diagnose de*), savelañ ur spesad nevez adal hiniennoù na c'haller rummañ e spesad kent ebet<sup>1</sup>.

#### ANAOUT AN DERC'HENNOU

Tremen a rin gant arver Gl. *identifier* er boelloniezh klasel, eleze e-keñver an derc'hennoù o taveiñ d'un ergeñverenn. Evit adkemer hon skouer voas : lakaat ez eus un *hevelep* eus Némo ha Hemon zo *hevelebiñ* Némo ha Hemon (F, p. 266).

Emaomp amañ war un dachenn nes d'ar Jedoniezh. Koulskoude e lezin a-gostez ar c'hudennoù jedoniel o sevel en-dro d'an termen Gl. *identifier*. E meur a lec'h e notennoù kent hon eus bet tro da sevel atersoù a-zivout natur an ergorennoù jedoniel, bezoud ur werc'helezh jedoniel, h.a. (F ; G ; J). Anzav a ran ne 'm eus ket distrec'het un diaester. Er gedvuhez, hevelebiñ div zerc'henn a emleg ergeñveriñ ouzh an un gwerc'henn. Hogen an derc'hennoù jedoniel n'o devez ket ergeñverennoù, ken e reer gwerc'hennoù anezho kenkoulz all. Ken e ve an hevelebiñ ganto kevemleg d'un *arunderc'hañ* pe... d'un *arunwerc'hañ* ?

#### IDENTIFIER E-KEÑVER BOUT

---

<sup>1</sup> Echu oa an notenn pa zegouezhas ganin *Le Quotidien du Médecin* (05 01 99) ma lenner, p. 64 : “Des chercheurs français identifient une nouvelle maladie musculaire. La myofasciite à macrophages [...]” Setu dres Gl. *identifier* arveret gant kemeradur Br. *ernaouiñ* : “Imbourc'herion c'hall o deus *ernaouet* ur c'haherad nevez. Ar miofaskiit makrofañgel [...]”

Hervez A. LALANDE, “ne hañval ar ger bezañ bet arveret nepred en e ster gerdarzhel : al *lakaat da vezañ hevelep*” (*Voc. Phil.*, p. 454). E daou zegouezh koulskoude emañ arveret Gl. *identifier* e kemeradurioù nes d'ar “ster gerdarzhel” : er Voudoniezh, er Bredelfennerezh.

#### ER VOUDONIEZH

En hinienn vev e tiforc'h Hans JONAS hevelepted alvezel (treanded) an elfennoù fizikel-kimiek ha hevelepted vevedel (treüded) an hinienn he unan (H, pp. 215 hh.). E se, emañ ar bev *hevelebet* ouzh an elfennoù alvezel en ampar hep bezañ koulskoude un *hevelep* gantañ. Kredet 'm eus goveliañ ar verb *kesoutañ* hag an araogenn *a-gesout* evit arouezañ “an devoud beziadel eston-se” ez eo koubladur an div hevelepted naous d'ar beved. Gant G. MARCEL e teu ur stadadenn heñvel ouzh hini H. JONAS : “Bezañ enkreudet eo naouiñ evel korf, evel ar c'horf-mañ, hep gallout *emhevelebiñ* outañ, hep gallout kennebeut emziforc'hiñ dioutañ” (KIS-523, La-11, p. 114). Diouzh e du, MERLEAU-PONTY n'emañ ket pell diouzh “an devoud eston” en deskivadur a ra, war-lerc'h PROUST, eus *hevelebidigezh* la Berma ouzh Phèdre : “Diwel ez a an dremmouez ha setu Phèdre o naouiñ. An ereulañ a bulluc'h an arouezioù ha ken klok eo pozitet la Berma gant Phèdre ma tiskouez he goursavidigezh e Phèdre bezañ barr an naturel hag an aezoni<sup>1</sup>.” Evel ma c'hoarvez da c'houzañvidi 'zo kaout un *Doppel-Ich*, un daou ve, e tizh an dremmour hevelebiñ e voud ouzh an dudenn : e voud a ya a-gesout ouzh an dudenn evel ma 'z a an alvez a-gesout ouzh ar beved en hinienn vev.

#### ER BREDELFENNEREZH

Hevelebidigezh an dremmour ouzh an dudenn zo ur furm eus an hevelebiñ (Al. *Identifizierung*) deskrevet gant ar Bredelfennerezh. Istor mennozioù FREUD war an divoud a gaver brastreset e GBLF. ¶¶ 562-565 ha n'eo ket va frepoz o dispakañ amañ. Evit d'ar mezeg viennat arbouezañ erzerc'hadoù kleñvedel an hevelebiñ, e lakae an hevelebiñ e kalon dialusk ar bred hag e penn gwikefreoù diorreadur ar bersonelezh. Diforc'hiñ a rae un *hevelebiñ me-ouzh-all* pe *allus* diouzh un *hevelebiñ all-ouzh-me, meüs*. A-gevenep d'an hevelebiñ e teskrive an *ervannañ* (Al. *Projektion*), anezhañ an ardaoliñ a ra ar gouzrec'h ouzh an amgen eus elfennoù bred diemouez : c'hoantoù,

<sup>1</sup> “[...] l'actrice devient invisible et c'est Phèdre qui apparaît. La signification dévore les signes, et Phèdre a si bien pris possession de la Berma que son extase en Phèdre nous paraît être le comble du naturel et de la facilité” (M. MERLEAU-PONTY, *Phénoménologie de la Perception*, p. 213, gant dave da M. PROUST, *Le Côté de Guermantes*).

santadoù, perzhioù, h.a., hervez ar goulun : un “e gasaat a ran” diemouez o tont emouez e rezh ur “va c’hasaat a ra”.

Doazhadur FREUD n'eo ket bet ar vihanañ andon d'ar sklerijenn taolet war vreskadurezh an hinienned denel — er c’heñver-se e tere ervat outañ an titl a “vestr ar gousell” debaret dezhañ gant RICŒUR (KIS-561, La-11, p. 400).